

Yannig an difouper neiziou

Eur zân gez evid ar rugale, anavezet, e Lenn, Kerre ha Treger

Allegretto

The musical score consists of five staves of music in G major and 2/4 time. The melody is simple and rhythmic, with lyrics written below each staff. The lyrics are in Breton and French.

Ka vet' peuz da zaout 'ta Yannig
Ka- vet' peuz da zaout 'ta? Ne' m eus ket
ne' m eus ket Gwel-loc'h 'geto' m eus ka vet.
Ne m eus ket ne m eus ket Gwel-loc'h ge to
m eus ka vet

1

Kavet ' peus da zaout 'ta Yannig,
Kavet ' peus da zaout 'ta ?
— Ne 'm eus ket, ne 'm eus ket, { bis
Gwelloc'h geto 'm eus kavet.

2

Petra ' peus kavet 'ta, Yannig,
Petra ' peus kavet 'ta, ?
— Eun neiz pig, eun neiz bran, { bis
Hag eun neizig laouenan.

3

Pe seurt viou ' z' enno 'ta, Yannig,
Pe seurt viou ' z' enno 'ta, ?
— Unan ruz, unan gwenn, { bis
Unan glas, unan melen.

6

Na piou a zisplufe askell al laouenanig,
Eul labousig ker bihanik e askell, e gein, e vruched,
[e c'houzoug, e benn, e veg,
Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

7

Na piou a zisplufe kov al laouenanig,
Eul labousig ker bihanik e gov, e askell, e gein, e vruched,
[e c'houzoug, e benn, e veg.
Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

8

Na piou a zisplufe lost al laouenanig,
Eul labousig ker bihanik e lost, e gov, e askell, e gein,
[e vruched, e c'houzoug e benn, e veg.
Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

9

Na piou a zisplufe gar al laouenanig,
Eul labousig ker bihanik e c'har, e lost, e gov, e askell, e
[gein, e vruched, e c'houzoug, e benn, e veg.
Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

10

Na piou a zisplufe troad al laouenanig,
Eul labousig ker bihanik e droad, e c'har, e lost, e gov,
[e askell, e gein, e vruched, e c'houzoug, e benn, e veg,
Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

11

Na piou a zisplufe ivin al laouenanig,
Eul labousig ker bihanik e ivin, e droad, e c'har, e lost,
[e gov, e askell, e gein, e vruched, e c'houzoug, e benn,
[e veg,
Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

Ar ganaouenn-man a zo bet desket d'in gand Per Lichou eus Plouzeniel. Distagellet mat e ranko heza ho teod evit gellout lavaret, fraes ha buan, en eun aridennad: e ivin, e droad, e c'har, e lost hag all, met, abouez poania e teuoc'h abenn. Chans vat d'eoc'h.